

*Tud ar vro - Bro Leon*  
Roll kanaouennoù – Ronds et rondes simples

**Tri verdead**

Tri verdead yaouank, *o gé trañ la, trañ la dira*  
Tri verdead yaouank hag e kompagnoneazh,  
Nag e kompagnoneazh, *o ge*  
Nag e kompagnoneazh.

Gant an avel daolet, *o gé trañ la, trañ la dira*  
Gant an avel daolet deus kostez bro ar Saozen,

'Kichenik ur vilin, *o gé trañ la, trañ la dira*  
'Kichenik ur vilin, eno e voe ur fumelenn

Ha n'ac'h eus ket a soñj, *o gé trañ la, trañ la dira*  
Ha n'ac'h eus ket a soñj abaoe ur wech e Naoned

E Naoned er marc'had, *o gé trañ la, trañ la dira*  
E Naoned er marc'had o choaz ur bizaoued

Bizaoued alaouret, *o gé trañ la, trañ la dira*  
Bizaoued alaouret o parlant diouzh an eured

Eureujomp-ni hon-daou, *o gé trañ la, trañ la dira*  
Eureujomp-ni hon-daou ha deomp da zalc'h ur menaj

Menaj o "comme il faut", *o gé trañ la, trañ la dira*  
Menaj o "comme il faut", an neb a ray a gavo

An 'ni na ray nentra, *o gé trañ la, trañ la dira*  
An 'ni na ray nentra, n'en dezo ket a vara

Da reiñ d'e vignoned, *o gé trañ la, trañ la dira*  
Da reiñ d'e vignoned ur wech mat diouzh da'm gwelet

Ha 'ni na ray nikun, *o gé trañ la, trañ la dira*  
Ha 'ni na ray nikun n'en dezo ket a vutun

Ha butun da fumiñ, *o gé trañ la, trañ la dira*  
Ha butun da fumiñ, na chika da c'hlaourenniñ

Ar c'hafe d'ar merc'hed, *o gé trañ la, trañ la dira*  
Ar c'hafe d'ar merc'hed hag ar c'hognak d'ar gwazed

Ar merc'hed 'zo lipous, *o gé trañ la, trañ la dira*  
Ar merc'hed 'zo lipous hag ar gwazed 'zo c'hoantus

Ha zoken betek re, *o gé trañ la, trañ la dira*  
Ha zoken betek re pa devez led ur banne

Ur banne a c'hwec'h leal, *o gé trañ la, trañ la dira*  
Ur banne a c'hwec'h leal da gas Perin d'ar gear.

Chanté par Mon Galliou ( lilia – perroz )